

D'AR GENERAL CAMBRON,

VAR E BRESANÇ E K'ER-AHÉS,

DEIZ LID STATU LA TOUR-D'AUVERGN,

27 Even 1841.

Unvanet en deiz-mà evit offr hon hommach
 Da vemor eur Breton eus ar brassa courach.
 Hor joa a gresq meurbet, o velet en hor c'hreiz
 Ar General CAMBRON, eveltân buguel Breiz.
 Cabiten hon Haros a dleze en effet
 Enori ar gouel-mà ha receo hon respet;
 Ar brezellyad bras-se, pini voa e qichen
 Pa goezas hon Haros gant gloar var an dachen.
 Hanvet eno qerqent qenta grenadier Franç
 Gant an oll soudardet, testou deus e vaillanç,
 Dre volesti heppen ractal e refusas,
 Dre ma ne gave qet en d'oa grêt avoalc'h c'hoas.

Biqen ne vo ancouët deiz eûzus Qiberon,
 E pelec'h e veljot humanite CAMBRON, (1)
 Wagram hac Austerlitz, Zurich, Ober-Hausen,
 Haineau, Leipsick, Iena, Dresd, Lutzen hac Bautzen:
 An oll bataillou-ze a zo testou patant
 Eus e c'houizieguez, eus e gourach ardant.
 Ar Spagn hac ar Russi o deus dalc'het memor
 A betra voa capabl CAMBRON, den a enor.

An hini a vouezas, en hon deiz maleurus,
 Deiz bataill Waterloo, bataill meurbet eûzus,
 Respont d'adversourien carguet a insolanç,
 Deus a fonç e galon, en güir haros a Franç,
 Dre gomzou immortel o deus grêt tro ar bed:
Ar Gouard oll a varvo, mes n'en em rento qet !....
 Zo hirio en hon touës. Breizis! a greiz calon
 Rentomp oll hon respet d'ar General CAMBRON;
 Rentomp hommach dezân, a ur vouez assambles:
 Gloar, enor da CAMBRON ra vezo da james!!!

A. LÉDAN.

(1) Cambron, humen ha vaillant, a gombattas gant ar brassa courach e Qiberon; savetât a eure emigreet qemeret an armou en o daouarn, ha n'en devoe qet memes aoun da exposi e vuez en eur guzat e ty e vain, epad daou vis antier, person La Ville-L'Evêq.